



16 a viz Kerzu 2021

## Kemennadenn

**Kelc'hlizher Ministerezh an Deskadurezh Stad diwar-benn kelenn ar yezhoù rannvro, diviz war heñchañ ar budjed gant ar Rannvro da "greñvaat ar strivoù evit yezhoù Breizh", emglev Stad-Rannvro : degouezhioù krennus a-benn an daou viz a zeu e-keñver stad mallus ar brezhoneg !**

E-giz m'en doa kemennet ar c'hentañ ministr d'ar 15 a viz Gwengolo kent, goude mennad disfiz diouzh al lezenn Molac dirak kuzul ar vonreizh [e oa bet embannet diriaou er Gazetenn Ofisiel ur c'helc'hlizher nevez diwar-benn kelenn ar yezhoù rannvro e Bro Frañs](#), goude ul labour a-stroll etre Ministerezh an deskadurezh stad, an ofisoù publik ar yezhoù rannvro, rouedad ar skolioù dre soubidigezh e yezhoù rannvro ha kevread ar rouedadoù kelenn divyezhek publik.

Diwar-se e vo degemeret ar c'helenn dre soubidigezh evel m'emañ e Diwan hag e vo kadarnaet an doare da gelenn dre soubidigezh er skolioù publik, ar pezh vez graet dija e skolioù zo, er skol-vamm dreist-holl. Un diviz all embannet gant Jean Castex a zeuio da wir hep dale gant krouidigezh un aozadur prederiañ peurbad war ar yezhoù rannvro dindan gwarez ar c'hentañ ministr.

Ha pa vefe un araokadenn ar c'helc'hlizher-mañ o suraat ar c'helenn dre soubidigezh, **ne vo ket a-walc'h da ziskoulmañ tout an diaesterioù a zo evit kelenn ar brezhoneg ha, dreist pep tra, reiñ lañs d'he c'helenn da vat**. Ar grafik da heul [bet embannet gant Ofis publik ar brezhoneg](#) met ivez an [danevell ziwezhañ \(sifroù distro-skol ar c'helenn divyezhek e 2021\)](#) a lak war-wel emañ kelenn ar brezhoneg en ur stad fall (ha gant-se dazont ar yezh) pa geñverier gant ar rannvroioù all e Frañs.

Pa oa bet breutaet ar budjed gant ar Rannvro, d'ar 16 a viz Kerzu, o erbediñ « kreñvaat ar strivoù evit ar brezhoneg » **e c'hortozomp ivez gant ar c'huzul Rannvro nevez ur gwir steuñv mallus evit ar brezhoneg** war mod ar steuñv "Marshall" diwar [an emglev-stur etre listenn Loïg Chesnais-Girard hag hini Daniel Cuffe](#).

**An araezioù arc'hantaouiñ a zle bezañ ivez evit ma vo tizhet an dalc'h evit dazont ar brezhoneg**. Ret-holl eo evit diorren he c'helenn d'an holl vretoned yaouank, dre ar c'helenn divyezhek pe dre ar c'helenn war ar prantad skol e stern mennad 7 al lezenn Molac.

An arc'hant gouestlet da yezhoù ar vro a zo par da 0,5% hepken eus budjed ar rannvro hiziv. An disterañ tra a vefe kas en un doare pazennek ha buan da 1% eus ar budjed. **Evit 2022 ez eus ezhomm eus un debarzhadur ouzhpenn a 4M€ da nebeutañ evit adaptout an dale a zo abaoe bloavezhioù.**

**Ar stad ivez a rank kemer e lod buan. Poentoù zo n'emaint ket e-barzh ar c'helc'hlizher hag a vo divizet diouzh imor ar rektordioù dre an emglevioù Stad-Rannvro**. Dav eo resisaat mat eno an araezioù doareadel ha kementadel a vo lakaet e pleustr evit tizhout ar palioù, en ur ledanaat ar c'helenn divyezhek hag en ur ziorren an holl hentenoù treuzkas.

Degas a reomp da soñj ne vo stabilet an niver a vrezhonegerien nemet gant ar pal a 50 000 skoliad divyezhek er vro. **Gouzout a reomp ez eus bet kaset d'ar stad kinnigoù a-zoare gant Kuzul ar Rannvro** evit ma vo tizhet ar palioù-se : tuta ha stummañ kelennerien, diorren ar skolioù divyezhek a zo ha digeriñ skolioù ouzhpenn.

**Gortoz a reomp gant ar stad, ha neuze gant ar rektordi e Breizh ma vo lakaet e pleustr kinnigoù ar Rannvro. N'omp ket evit asantiñ disfiz pe diskont a-zivout ar c'hinnigoù-se a rofe an tu da virout hor glad boutin en arvar, da lavaret eo ar brezhoneg.**